

Raok an Hañv

KREIZ-BREIZH

09/05
> 14/06
2026

ABADENNOÙ E BREZHONEG

Temps fort autour
de la langue bretonne


KAOZEADENNOÙ Discussions

SINEMA Cinéma

C'HOARIOÙ Jeux

BALEADENNOÙ Balades

ATALIEROÙ Ateliers



GOÛT HIROC'H
Toutes les infos

RAOK.BZH

Gerig ar prezidant

Setu dispaket an nevezamzer hag ar program-mañ.
Bleunioù zo a daol c'hwezh vat, klevet e vez fraoñv ha frond.
Birvilh zo er vro! Youc'hadennoù entanet, ha c'hoarzh
ha kanaouennoù...
Liesseurt eo an abadennoù kinniget deoc'h. Plijadur 'vo a dra sur.

Note du président

Voici l'édition 2026 ! Un programme pour tout.e.s et tous.
Raok est l'entente de pays du Centre Bretagne et on vous attend
pour faire ensemble, sur notre territoire avec notre langue,
le breton. D'autres informations sur notre site et les internets,
ou bien encore ici et là de vive voix.



Diskouezhadeg «Mein Breizh» - 'Nan

**EUS AN 7 A VIZ MAE BETEK
AN 13 A VIZ EVEN**
Langoned, Kreizenn
sevenadurel An Triskell
Digoust

An diskouezadeg «Mein Breizh» a zo kinniget gant Anne Cadorel, 'Nan. Breizh a zo skeudennaet war an taolennoù. Pep oberenn a zo liammet gant ur skrid e brezhoneg hag e gallaoueg, evit diskouez pinvidigezh yezhoù ar vro.

Exposition «Mein Breizh» - 'Nan

DU 07 MAI AU 13 JUIN
Langonnet,
Centre culturel An Triskell
Gratuit

Anne Cadorel, 'Nan, propose l'exposition «Mein Breizh», à partir de ses tableaux représentants les paysages bretons. Chaque tableau est accompagné d'un texte en breton et en gallo pour mettre en valeur le patrimoine linguistique du pays.

AR REDADEG

3e : Melldroad, melldroad gouezeleg, arletism
 4e : c'hoarioù breizh, echedoù, paledoù
 5e30 : tañva dans fisel
 6e30 : tañva d'ar brezhoneg
 7e : Krampouezh, apero, sonerezh...
 8e15 : gym tonik
 9e : tremen ar Redadeg

9/05/26

**Sport ha brezhoneg e Rostrenn
 evit tremen ar Redadeg !**

Sport et langue bretonne pour le passage de la Redadeg à Rostrenn !
 15h : Football - football gaélique - Athlétisme - 16h : jeux breton, échecs, palets
 17h30 : initiation à la danse Fisel et au breton - 19h : crêpes, buvette, musique,
 20h15 : Gym tonique, 21h : passage de la Redadeg **Digoust - Gratuit**

Lid-digeriñ
 Raok an Hañv
 - Sport
 ha brezhoneg
 evit tremen
 ar Redadeg
 e Rostrenn

SADORN 9 A VIZ MAE - 3e
Rostrenn,
Tro dro ar vediaoueg
Digoust

Profit a ra kevredigezhoù Rostrenn eus tremen ar Redadeg evit aozañ un devezh tro dro ar sport hag ar dudioù hag ar brezhoneg. Er programm : atleterezh, melldroad, melldroad gouezeleg, echedoù, paledoù, c'hoarioù Breizh, tañva d'an dañs fisel ha d'ar brezhoneg...
Adalek 3e - Tremen ar Redadeg da 9e. Krampouezh, tavarn ha sonerezh war al lec'h.

Inauguration
 de Raok an Hañv
 - Sport et langue
 bretonne
 pour le passage
 de la Redadeg
 à Rostrenn

SAMEDI 09 MAI - 15h
Rostrenn,
Autour de la médiathèque
Gratuit

Les associations de Rostrenn profitent du passage de la course dans leur bourg pour organiser un événement commun autour du sport et des loisirs et de la langue bretonne. Au programme : athlétisme, football, football gaélique, échecs, palets, jeux bretons, initiation à la danse fisel et à la langue bretonne...
À partir de 15h - Passage de la course à 21h. Crêpes, buvette et musique sur place.



Sonerezh Breizh gant Eliaz le Bot ha Gweltaz Rault

SADORN 9 A VIZ MAE - 9 e 30
Rostrenn, Ti Devine's

Gant an daouad e vo astennet
an nozvezh sport ha brezhoneg
gant son ar biniou hag ar
vombard.

Foar an traoù kozh

SUL 10 A VIZ MAE - 9h
Karaez, Tro-dro d'ar c'hoc'hu
4€/m (gwerzidi)
Digoust (publik)

Deuit da brenañ traoù
marc'had-mat e Karaez !
Dilhad, listri, traoù a bep seurt
a blijio deoc'h ! Traoù kozh
da werzhañ digant hiniennoù
ha digant tud a vicher.
*Boued hag abadennoù
a bep seurt.*

Musique bretonne avec Eliaz le Bot et Gweltaz Rault

SAMEDI 9 MAI - 21h 30
Rostrenn, Ti Devine's

Le duo vous fera prolonger
la soirée sport et langue
bretonne au son du biniou
et de la bombarde.

Troc et puces

DIMANCHE 10 MAI - 9h
Carhaix, Autour des halles
4€/m (exposants)
Gratuit (public)

Venez faire de bonnes affaires
à Carhaix ! Vêtements,
vaisselle, petits meubles...
Vous trouverez forcément
quelque chose qui vous plaira !
Ouvert aux particuliers
et professionnels.
*Buvette, restauration,
animations.*



Kanomp war an duchenn

SUL 10 A VIZ MAE - 2e
St-Riwal, Menez Mikael
Digoust

Tuchenn Mikael, E kreiz an noz, Distro ar gelted, Ni hon unan. Kanomp tout asambles kanaouennoù Youen Gwernig evit tremen ar Redadeg e Menez-Mikêl ha lidomp 100 bloaz ar barzh.

*Emgav da 2e evit kanañ -
Tremen ar Redadeg da 3e.*

Gweladenniñ Mirdi Serusier

SUL 10 A VIZ MAE - 11e
Kastell-Nevez-ar-Faou,
1 plasenn André Le Gall
Eus 3€ betek 10€

Gweladenn displeget diskouezadeg pad ar Mirdi Serusier. Diskouez a ra homañ hentad arzour Marguerite ha Paul Sérusier hag ivez o liammoù gant o c'hêr-degemer, Kastell-Nevez-ar-Faou.

Chantons sur la colline

DIMANCHE 10 MAI - 14h
St-Rivoal, Mont-Saint-Michel
de Brasparts
Gratuit

Tuchenn Mikael, E kreiz an noz, Distro ar gelted, Ni hon unan. Chantons tous ensemble les chansons de Youenn Gwernig lors du passage de la Redadeg au Mont Saint-Michel de Braspart pour les 100 ans du poète !

*Rendez-vous à 14h
pour chanter - Passage
de la course à 15h.*

Visite commentée du Musée Sérusier

DIMANCHE 10 MAI - 11h
Châteauneuf-du-Faou,
1 place André Le Gall
De 3€ à 10€

Visite commentée de l'exposition permanente du Musée Sérusier. Cette dernière présente le parcours artiste de Marguerite et Paul Sérusier ainsi que leurs liens avec leur ville d'adoption, Châteauneuf-du-Faou.



Pezh c'hoari Sinet Marielle

SUL 10 A VIZ MAE - 10 e 30
Karaez, Ti ar vro

Ur pezh c'hoari a-stroll evit ar re yaouank. Ur faktourez, Marielle, a ra tro skolioù Breizh war varc'h-houarn o klask degemerer ul lizher kollet. Erruout a ra er porzh gant he marc'h-houarn hag he holl ostilhoù « faktourez war varc'h-houarn » ha goude-se adkavout ar skolidi er skol. Goulenn a ra skoazell digant ar skolidi evit ober hec'h enklask, ha profitañ a ra ivez evit ober un ehan ha komz eus he labour, Marielle a sav poltred ar re gozh a gejj ganti bemdez e-pad he zroiad, hag hini he zad-kozh lfig. lfig he deus treuzkaset dezhi plijadur mont war tommder ar marc'h-houarn.

Kaozedennoù e Landelo

MEURZH 12 A VIZ MAE
6 e 30
Landelo, Presbital kozh
Digoust

Deuit da flapiñ ! Atalier evit komz pe klevet brezhoneg. Digout d'an holl liveoù.

Pièce de théâtre Sinet Marielle

DIMANCHE 10 MAI - 10 h 30
Carhaix, Ti ar vro

Une pièce de théâtre participative destinée au jeune public. Une factrice, Marielle, fait le tour des écoles de Bretagne à vélo à la recherche du destinataire d'une lettre perdue. Elle arrive dans la cour avec son vélo et tous ses accessoires de « factrice cycliste » puis retrouve les élèves dans l'école. Elle demande de l'aide aux élèves pour son enquête et en profite aussi pour faire une pause et parler de son travail, Marielle dresse le portrait des petits vieux qu'elle rencontre tous les jours pendant sa tournée, et celui de son grand-père lfig, qui lui a transmis la passion du vélo.

Causeries à Landeleau

MARDI 12 MAI - 18 H 30
Landeleau, Ancien presbytère
Gratuit

Venez discuter ! Papotte en breton ouverte à toutes et tous, débutants ou confirmés.



Fest-noz

MERC'HER 13 A VIZ MAE

C'hastell Nevez

8€, digoust -18 bloaz

Dañserien Ar C'hastel-nevez a zo ur strollad dañsoù breizhek dudi a ginnig kentelioù dañsoù breizhek e kumun Kastell-Nevez-ar-Faou d'ar Merc'her da noz. Ho pediñ a reont d'o festoù-noz. Klask a ra an intrudu-se lakaat sevenadur Breizh da vezañ digor d'an holl, degemeret mat eo an dañserien kadarnaet evel an deraouidi. E-tal ar strollad Modkozmik.

Tro Menez Are

YAOU 14 A VIZ MAE

Sant-Tegoneg-Logeginer

Eus 1€ da 10€

Bep bloaz, d'ar da Yaou Bask, e vez dizoloet a-drugarez da dTro Menez Are, dre meur a dro-vale er-maez eus an hentoù bras, kaerderioù, pinvidigezh ha liesseurted lec'hioù ha glad sevenadurel Menez Are.

Loc'het e vez bep taol eus ur gêr disheñvel : ar gweledvaoù treuzet ne vezont morse ar memes re !

Fest-noz

MERCREDI 13 MAI

Châteauneuf-du-Faou

8€, gratuit pour les - 18 ans

Les danseurien Ar C'hastel-nevez est un groupe de danse bretonne loisirs qui propose des cours de danse bretonne sur la commune de Châteauneuf-Du-Faou le mercredi soir. Ils vous invitent à leur fest-noz.

Cette initiative vise à rendre la culture bretonne accessible à tous, les danseurs confirmés comme les débutants sont les bienvenus. En présence du groupe Modkozmik.

Tro Menez Are

JEUDI 14 MAI

Saint-Thégonnec

-Loc-Eguiner

De 1€ à 10€

Tous les ans, le jeudi de l'Ascension, le Tro Menez Are permet de découvrir, grâce à plusieurs randonnées en dehors des axes routiers, la beauté, la richesse et la diversité des lieux et du patrimoine culturel des Monts d'Arrée. Il est itinérant : la commune d'accueil change tous les ans, les paysages traversés ne sont jamais les mêmes !



En enor da Erik Marchand

GWENER 15 A VIZ MAE
SADORN 16 A VIZ MAE
SUL 17 A VIZ MAE

Poullaouenn, Salle Amzer Zo
Bourk Mikêl (Groñvel),
Sal ar gouelioù
Eus 8 € betek 16 €,
Digoust -18 bloaz
(nemet ar pred)

D'ar 15 ha 16 a viz Mae e Poullaouen, ha d'ar 17 a viz Mae e Sant-Mikael-Groñvel e vo aozet un darvoud en enor da Erik Marchand. Aozet eo an devezhioù-se gant Dañs-Tro, Paotred an Dreujenn Gaol, Ar Stal Vras ha Drom Kreiz Breizh Akademi. Sonadegoù, fest-deiz ha fest-noz, pred-kanet a vo war ar programm. Sonerien eus Breizh hag ar bed a-bezh a gemero perzh, en ur heuliañ spered hent-buhez Erik Marchand, kaner, soner ha beajour, bet bepred digor war sevenadurioù ar bed.

Hommage à Erik Marchand

VENDREDI 15 MAI
SAMEDI 16 MAI
DIMANCHE 17 MAI

Poullaouen, Salle Amzer Zo
puis St Michel en Glomel,
Salle des fêtes
De 8 € à 16 €
Gratuit pour les - 18 ans
(sauf le repas)

Dañs-tro, Paotred an Dreujenn Gaol (Clarinette Populaire), La Grande Boutique et Drom Kreiz Breizh Akademi organisent un événement artistique en Hommage à Erik Marchand qui se déroulera entre Poullaouen, les 15 et 16/05 et St Michel en Glomel le 17/05. Concerts, fest-deiz et fest-noz, repas chanté sont au programme et impliqueront des artistes de Bretagne et d'ailleurs à l'image du parcours de cet artiste voyageur et ouvert sur le monde.



Baleadenn diwar kan al lapoused

**SADORN 16 A VIZ MAE
1e 30**

**Landelo,
Emgav er Presbital kozh
Priz diouzh ho c'hoant**

Baleadenn evnoniezh e
brezhoneg tro-dro d'ar presbital
kozh evit selaou hag anavezout
al laboused, lusket gant
Philippe Vouedec.
Digor d'an holl, tud entanet hag
amatourien, brezhonegerien
ampart pe deraouidi.

Bal Folk

**SADORN 16 A VIZ MAE - 8e
Rostrenn, Ti Devines
Disgoust**

Dont a ra an daouad IgoNoz
eus ar Pireneoù da-geñver
un droiad evit gouelioù Breizh.
Lakaat a raint ar violoñs hag
ar violoñsell da gemmeskañ
evit ul lañs da zañsal a-stroll.
An daou evn-noz a ya d'ober
ar c'hinnig-se a fell dezho
lestrañ ac'hanoc'h e bourzh
o faltazi evit dañsal, en
em zispakañ ha mont da
gejañ ouzh ar re all. Dañsoù
hengounel eus Breizh hag
Occitania a veaj etre trad' folk
vals, mazurka, tonioù nevez,
tonioù kenstag ha hunvreoù
flemmus evit rannañ ur prantad
sonerezh ha bev gant e
arvesterien !

Balade sur le thème des oiseaux

SAMEDI 16 MAI - 13h30
**Landeleau, Rendez-vous
à l'ancien presbytère**
Prix libre

Balade ornithologique en breton
autour de l'ancien presbytère
pour écouter et identifier
les oiseaux, animée par
Philippe Vouedec.
Ouvert à tous. tes, passionnés
et amateurs, bretonnants
confirmés ou débutants.

Bal Folk

SAMEDI 16 MAI - 20h
**Rostrenn, Ti Devine's
Gratuit**

Le duo IgoNoz vient
des Pyrénées dans le cadre
d'une tournée pour les fêtes
de la Bretagne. Ils feront
s'entremêler le violon et
le violoncelle pour un élan
de danse collective.
Les deux oiseaux de nuit qui
composent cette proposition
souhaitent vous embarquer
à bord de leur imaginaire
pour danser, virevolter et aller
à la rencontre des autres.
Danses traditionnelles
Bretonnes, Occitanes,
voyages dans le trad' folk et
ses cercles-vals-mazurka,
airs nouveaux, mélodies
contiguës et rêves frivoles
pour partager un moment
musicale et vivant avec
son public !



Sine tabut : Dastum

MERC'HER 20 A VIZ MAE

8 e

**Karaez,
Sinema Le Grand Bleu**

6 €

Teulfilm gant Giuseppe De Vecchi. Buhezegezh sevenadur hengounel Breizh zo dleet da ijinañ un dra : ar magnetofon kasedig. Reiñ a reas tro d'ur yaouankiz da zastum komzoù, sonerezhioù ha kanaouennoù ur bed war-nes mont da get. Hiziv an deiz, da vare internet, e c'haller kavout kantadoù a viliadoù a eurvezhioù enrolladennoù enlinenn, evit netra hag evit an holl. Gant ar film e vez goulennet penaos e vefe un hêrezh evel-se, ha kontañ a ra un avantur a-stroll dreistordinal.

Ciné-débat : Dastum, la maison des sources

MERCREDI 20 MAI - 20 h

**Carhaix,
Cinéma Le Grand Bleu
6 €**

Documentaire de Giuseppe De Vecchi. La vitalité de la culture traditionnelle bretonne est tributaire de l'invention d'un objet : le magnétophone à cassette. Il permet à une certaine jeunesse de recueillir, juste à temps, les paroles, les musiques et les chants d'un monde sur le point de disparaître. Aujourd'hui, à l'heure d'Internet, des milliers d'heures de ces enregistrements sont accessibles en ligne, gratuitement et pour tout le monde. Interrogeant le sens d'un tel héritage, le film raconte une extraordinaire aventure collective.



Diskord

**EUS AR GWENER 22 BETEK
AR SUL 24 A VIZ MAE**
Rostrenn, Garaj Duro,
39 straed Ollivier Perrin

Kenlabourat a ra ar Fiselerezh ha La Fourmi-e a-benn kinnig un abadenn arzel nevez a lakao an arzou gwelet hag ar sonerezh da gendivizout, da-geñver Gouel Breizh 2026. Diskouez a ra ar festival DISKORD e fell d'an holl skoazellañ ar skignañ pleustroù arzel a-bep-eil, dibar ha divoutin, en ur zigeriñ ul lec'h ma vo lakaet ar brezhoneg en enor, koulz en un doare hengounel, kempred, hag arnodel.

En ur vodañ sonerien, raperien, aozerien hag arzourien arzoù gwelet e fell da festival DISKORD lakaat war-wel ar birvidigezh a zo bremañ gant ar stummoù arzel a zo bremañ e-kreiz ar c'hrouiñ a vremañ. Gant ar c'hendiviz etre diskiblezhioù e c'haller neuze lakaat ar gaoz war an harzoù fiñvus etre ar sevenadurioù bihanniver hag ar sevenadurioù a-yoc'h, en ur lavaret eo ret skoazellañ an nevez-arnzel, an identelezhioù rannvroel hag an eztaolioù poblek a gendalc'h da stummañ hor faltazi a-stroll.



Diskord

**DU VENDREDI 22
AU DIMANCHE 24 MAI**
Rostrenn, Garaj Duro,
39 rue Ollivier Perrin

La Fiselerie et La Fourmi-e, s'associent afin de proposer un nouvel événement artistique qui fera dialoguer les arts visuels et la musique, à l'occasion de la Fête de la Bretagne 2026.

Le festival DISKORD reflète une volonté commune d'accompagner la diffusion de pratiques artistiques alternatives, originales et non conventionnelles, tout en ouvrant un espace où la langue bretonne sera mise à l'honneur, aussi bien dans une approche traditionnelle, contemporaine, qu'expérimentale.

En réunissant musiciens, rappeurs, auteurs et artistes d'arts visuels, le festival DISKORD souhaite mettre en lumière la vitalité actuelle de formes artistiques qui, autrefois perçues comme marginales, sont désormais au cœur de la création contemporaine. Ce dialogue entre disciplines permet ainsi de questionner les frontières mouvantes entre cultures minoritaires et culture de masse, tout en affirmant la nécessité de soutenir l'innovation artistique, les identités régionales et les expressions populaires qui continuent de façonner notre imaginaire collectif.



Bugale Kreiz-Breizh

GWENER 22 A VIZ MAE - 7e
Karaez, Leurenn Glenmor
Priz diouzh ho c'hoant

Ar sonadeg Bugale
Kreiz-Breizh a vod bep bloaz
300 skoliad divyezhek ha dre
soubidigezh ar vro. 300 skoliad
a gan asambles un dibab
kanaouennoù, eus an tonioù
hengounel d'ar re vrudet er bed
a-bezh, troet a-ratozh kaer
e brezhoneg evit ar sonadeg.

Fest-noz ar yaouankiz

GWENER 22 A VIZ MAE - 9e
Karaez, Leurenn Glenmor
Priz diouzh ho c'hoant

Kenleur 29 ha Raok a genlabour
da geñver Fest ar vugale
ha sonadeg Bugale
Kreiz-Breizh evit aozañ ur fest-
noz ar yaouankiz. Un digarez
evit ar re vihan hag ar re vras
da dremen ur pennad mat war
sin an treuzkas !
Miret eo al leurenn d'ar re
yaouank a fell dezho kanañ
pe seniñ un ton da zañsal.
Enskrivadurioù ha titouroù gant
Raok.

Bugale Kreiz-Breizh

VENDREDI 22 MAI - 19h
Carhaix, Espace Glenmor
Prix libre

Le concert Bugale Kreiz-Breizh
rassemble chaque année
300 élèves des écoles
bilingues et immersives
du Centre-Bretagne.
Ils chantent ensemble en
breton une sélection de chants,
allant du répertoire traditionnel
aux « tubes » français
et internationaux traduits pour
l'occasion, accompagnés
de musiciens professionnels.

Fest-noz ar yaouankiz

VENDREDI 22 MAI - 21h
Carhaix, Espace Glenmor
Prix libre

Kenleur 29 et Raok s'associent
à l'occasion de Fest ar vugale et
du concert Bugale Kreiz-Breizh
pour organiser un fest-noz de
la jeunesse. L'occasion pour
petits et grands de passer
un bon moment sur le signe
de la transmission !
La scène est dédiée aux jeunes
qui souhaitent chanter ou jouer
un air à danser.
Inscriptions et renseignements
auprès de Raok.



Fest ar vugale

SADORN 23 A VIZ MAE - 10 e
Karaez, Leurenn Glenmor
Digoust

Evit an trede gwech e vo bodet bugale ha krennarded ar c'helc'hioù keltiek ezel eus ar C'hevread Kenleur Penn-ar-Bed e Karaez da-geñver o fest vras bloaziek, Fest ar Vugale, da-geñver gouel Breizh. D'ar Sadorn da noz e vo gouestlet adarre da zegemer ar grennarded, gant tout o ijin hag o startijenn ! Lakaat a raint war-wel hor sevenadur hag he dazont. Bamet e voc'h a-dra-sur ! D'ar Sul e tibuno ar 700 bugel bennak gant dilhad engounel ha sonerezh e straedoù kêr a-raok mont d'an Egorenn Glenmor. Un dibenn-sizhun abadennoù war al leurenn evit (ad)dizoleiñ sevenadur ha dañs Breizh. *An holl, tavarn ha boued war al lec'h.*

Fête des enfants

SAMEDI 23 MAI - 10h
Carhaix, Espace Glenmor
Gratuit

Pour la 3^e année consécutive, les enfants et adolescents des cercles celtiques adhérents de la Fédération Kenleur Penn-ar-Bed se retrouvent à Carhaix à l'occasion de leur grande fête annuelle, Fest ar Vugale, dans le cadre de la fête de la Bretagne. Le samedi soir sera à nouveau dédié à l'accueil des adolescents, avec toute leur créativité et leur énergie ! Ils mettront en valeur notre culture et son avenir. Vous serez ébahis à coup sûr ! Le dimanche, les quelques 700 enfants défileront en costumes et en musique dans les rues de la ville avant de rejoindre l'Espace Glenmor. Un week-end de spectacles sur scène pour (re)découvrir la culture et la danse bretonnes. *Tout public, buvette et restauration sur place.*



Nozvezh ar mirdioù

SADORN 23 A VIZ MAE - 2 e
 Karaez, Kreizenn arkeologel
 Vorgium, 5 straed Dr Menguy
 10€ bep ar c'hoarier
 evit ar c'hoari achap
 Digoust evit an abadennoù all.

Enklask tenzor evit
 ar vugale, c'hoari-achap
 evit ar grennarded / tud devet
 + diskouezadur sko peizhioù
 moneiz roman. Aliet eo mirout
 evit ar c'hoar achap.

Fest ar c'hoad

SADORN 23 A VIZ MAE - 2 e
 Karnoed, La Villeneuve,
 Stal Koat

Dorioù digor an embregerezh
 Boiserie Le Creff hag
 ur c'hinnig eus ar filierenn koad.
 Un heskennerzh hezoug,
 un drailhaer koad hag un troer-
 koat a vo. Ur marc'had lec'hel
 hag un atelier kanterezh gouez
 a vo ivez kaset e brezhoneg
 hag e galleg gant Isabelle
 Caignard. Devezh o klozañ
 gant ur fest Noz gant Carré
 Manchot, War Sav, stourm,
 Portanguer/ Pinc/ Le Creff,
 Le Brigant/Prigent, Clech/Oges,
 Le Bouc'h/Guillerm.

Nuit des musées

SAMEDI 23 MAI - 14 h
 Carhaix, Centre archéologique
 Vorgium, 5 rue Dr Menguy
 10€ par joueur
 pour le jeu de piste
 Gratuit pour les autres
 propositions.

Jeux de piste pour enfants,
 escape-game en réalité
 virtuelle pour les ados/ adultes
 + démonstration de frappe de
 monnaie antique. Réservation
 de l'escape-game conseillée.

Fête du bois

SAMEDI 23 MAI - 14 h
 Carnoët, La Villeneuve,
 Boiserie Le Creff

Portes ouvertes de l'entreprise
 Boiserie Le Creff et
 une présentation de la filière
 bois. Seront présents
 une scierie mobile, un broyeur
 de bois et un tourneur. Il y aura
 également un marché local et
 un atelier de vannerie sauvage
 animée en breton et en français
 par Isabelle Caignard.
 Journée se clôturant par un fest
 Noz avec la présence de Carré
 Manchot, War Sav, stourm,
 Portanguer/ Pinc/ Le Creff,
 Le Brigant/Prigent, Clech/Oges,
 Le Bouc'h/Guillerm



Kaozedennoù e Landelo

MEURZH 26 A VIZ MAE
2 e 30

Landelo, Presbital kozh
Digoust

Deuit da flapiñ ! Atalier evit
komz pe klevet brezhoneg.
Digor d'an holl liveoù.

Session bretonne

MERC'HER 27 A VIZ MAE
9e

Rostrenn, Ti Devines

Yann-Ewen L'Haridon
ha Floriane Le Pottier a ginnig
d'an holl sonerien.ezed
ha kanerien.ezed o deus
c'hoant da vont asambles ganto
evit rannañ ur pennad, un ton,
ur banne pe un asiedad fritez !
Plijadur gwarantet !

Kaozeadegoù

GWENER 29 A VIZ MAE
5 e 30

Mirdi ar gar Gwiskri

Kaozeadenn digor d'an holl
liveoù. Gellet a ra degas
anaoudegezhioù ha geriaoueg
war un tem resis. Un digarez
eo ivez d'ober anaoudegezh
gant brezhonegerien a -vihanik,
ha da glevet ha da gomz
brezhoneg ar vro.

Causeries à Landeleau

MARDI 26 MAI - 18 h 30

Landeleau, Ancien presbytère
Gratuit

Venez discuter ! Papotte en
breton ouverte à toutes et tous,
débutants ou confirmés.

Session bretonne

MERCREDI 27 MAI - 21h
Rostrenn, Ti Devines

Yann-Ewen L'Haridon
et Floriane Le Pottier proposent
à tous les musicien.nes
et chanteur.euses qui le
souhaitent de se joindre à eux
pour partager un moment,
une mélodie, un verre
ou une assiette de frites !
Plijadur garanti !

Discussion en breton

VENDREDI 29 MAI - 17h30

Musée de la gare de Guiscriff

Discussion accessible à
tous les niveaux. Elle permet
d'acquérir des connaissances
et du vocabulaire sur un thème
précis. C'est aussi l'occasion
de rencontrer des brittophones
de naissance, et d'entendre
et de parler le breton local.



Concert de Brieg Guerveno

Sonadeg Brieg Guerveno

SADORN 30 A VIZ MAE - 8e
Sant Segal, 3 plasenn an Iliz,
Bistrot Amzer Zo
Priz diouzh c'hoant an dud

Evit ar re o deus dizoloet Brieg Guerveno gant *Vel Ma Vin*, e bladenn a-raok, emañ ar froudoù a vez santet adalek ar c'hentañ emglevioù. Neuze, evel-just, e c'hortozer bras dizoloñ *Un noz a vo* e bladenn nevez. Brieg Guerveno en deus dibabet digeriñ bras dorioù e ene d'ar c'hempennadurioù youlek, kempennadurioù kerdin barok, taboulinoù sintetek pe taboulinoù akoustek. Ha vat a ra !

Atelier kan gant Le Corre/Fustec

SADORN 30 A VIZ MAE
9e30
Karaez, Ti ar vro
10€

Ar pal : deskiñ ur ganaouenn hag adlakaat anezhi war marc'had Karaez e fin an atelier. Bep miz e ped Raok kanerien pe kanerezed da zont da rannañ o doare da ganañ e brezhoneg. Ar wech-mañ e vo graet anaoudegezh gant gavotenn Skrigneg gant Brigitte Le Corre ha Marie-Laurence Fustec !

SAMEDI 30 MAI - 20h
Saint Ségal, 3 place
de l'Église, Bistrot Amzer Zo
Prix libre

Pour ceux qui ont découvert Brieg Guerveno avec *Vel Ma Vin*, son album précédent, les frissons ressentis dès les premiers accords sont de ces moments inoubliables. Alors évidemment l'attente est grande de découvrir *Un noz a vo* son nouvel album. Synthétiseurs modulaires extatiques, pianos abyssaux en clair-obscur, arrangements de cordes baroques, percussions synthétiques ou batteries acoustiques, Brieg Guerveno a choisi d'ouvrir grand les portes de son âme aux arrangements ambitieux. Et ça fait du bien !

Atelier chant avec Le Corre/Fustec

SAMEDI 30 MAI - 9h30
Carhaix, Ti ar vro
10€

L'objectif : apprendre une chanson et la restituer sur le marché de Carhaix à la fin de l'atelier. Chaque mois, Raok invite des chanteurs ou chanteuses à venir partager sa pratique du chant en breton. Cette fois, Brigitte Le Corre et Marie-Laurence Fustec nous feront découvrir la gavotte de Scrignac !



Baleadenn familh en-dro da ouiziegezhioù ar bobl war ar plant e Breizh

SUL 31 A VIZ MAE - 10e
Lannejenn,
31 straed Jean Cadic
Digoust

Ar gevredigezh An Ti Glas ha mediaoueg Lannejenn a ginnig ur valeadenn familh 3-4 km, en-dro d'ar gouiziegezhioù pobl war ar plant e Breizh. Ar bourmenadenn-mañ a roio tro d'ar berzhidi d'ober anaoudegezh gant ar c'houlzad Lannejenn ha da selaou gouiziegezhioù liesseurt war plant Breizh. Da skouer ar c'hrapouezh mouzig evit parañ an devadennoù. pleustroù dudi, teknikoù, implijoù louzaouiñ, boued, kinklañ, kredennoù hud, lidoù relijiel...

Balade familiale autour des savoirs populaires sur la flore en Bretagne

DIMANCHE 31 MAI - 10h
Lanvenegen,
31 rue Jean Cadic
Gratuit

L'association An Ti Glas et la médiathèque de Lanvégen proposent une balade familiale de 3-4 km, autour des savoirs populaires sur la flore Bretonne. Cette promenade permettra aux participants de découvrir la campagne Lanvégenénoise et d'écouter des savoirs diversifiés sur la flore de Bretagne. Par exemple le *Krapouezh mouzig* (nombril de vénus) pour soigner les brûlures. Pratiques ludiques, techniques, usages médicaux, alimentaires, décoratifs, croyances magiques, rituels religieux...



Lodenn an aelez

SUL 31 A VIZ MAE - 2 e
Gourin, Sinema Jeanne d'Arc
Priz un abadenn sinema

E Glasgow, Robbie, deuet da vezañ tad, ne c'hell ket en em zistagañ diouzh e vuhez feller. Ober a ra anaoudegezh gant Rino, Albert ha Mo, ur plac'h yaouank. Evelto e tremen ku-ha-ka hep bezañ toullbac'het, met paket eo gant labourioù evit ar gevredigezh. Harry, an desaver a ra war o zro, a zeu da vezañ o mentor nevez, o reiñ dezho, dre guzh, da anaout ar whisky.
Film Ken Loach, Lodenn an aelez, skignet e brezhoneg, istitlet en galleg.

Kaozedennoù e Landelo

MEURZH 2 A VIZ EVEN
6 e 30
Landelo, Presbital kozh
Digoust

Deuit da flapiñ ! Atalier evit komz pe klevet brezhoneg. Digout d'an holl liveoù.

La part des anges

DIMANCHE 31 MAI - 14 h
Gourin, Cinéma Jeanne d'Arc
Tarif cinéma

À Glasgow, Robbie, jeune père de famille, est constamment rattrapé par son passé de délinquant. Il croise la route de Rhino, Albert et la jeune Mo lorsque, comme eux, il échappe de justesse à la prison mais écope d'une peine de travaux d'intérêts généraux. Henri, l'éducateur qu'on leur a assigné, devient alors leur nouveau mentor en les initiant secrètement à l'art du whisky.
Film de Ken Loach, La part des anges, diffusé en breton sous-titré français.

Causeries à Landeleau

MARDI 2 JUIN - 18 h 30
Landeleau, Ancien presbytère
Gratuit

Venez discuter ! Papotte en breton ouverte à toutes et tous, débutants ou confirmés.



Al liorz h legumaj

MEURZH 2 A VIZ EVEN - 7^e
Rostrenn,
Chez Le Rouquin Qui Roule
Priz diouzh ho c'hoant
(emezelañ da Jardin Biskoul
adalek 1€)

Tro-dro un daolenn, gant ar c'hartoù Jardin Biskoul, e rimp anaoudegezh gant familhoù al legumaj, penaos hadañ ha gounit anezho, treiñ an trevadoù... Ur prantad evit eskemm e brezhoneg diwar-benn al liorz h. Gallout a rit degas greun pe plant da reiñ pe eskemm m'ho peus c'hoant !

Filaj

YAOU 4 A VIZ EVEN - 8^e30
Langoned,
La Grande Boutique
Digoust

Drom ha La Grande Boutique a bed ac'hanoc'h d'ur mare brav a sonerezh hag a rannañ gant stajidi an Hentad Sonerezh Modale #2 ha Kreiz Breizh Akademi #11.
Digout d'an holl.

Le potager en breton

MARDI 2 JUIN - 19h
Rostrenn,
Chez Le Rouquin Qui Roule
Prix libre (adhésion association
Jardin Biskoul, à partir de 1€)

Autour d'une table, avec les cartes légumes Jardin Biskoul, découvrons ensemble les légumes, leurs familles botaniques, comment les cultiver, organiser des rotations, faire ses semences... Un moment d'échange en breton sur le jardinage. Ramenez aussi graines ou plants à donner ou échanger !

Veillée bretonne

JEUDI 4 JUIN - 19h30
Langonnet,
La Grande Boutique
Gratuit

Drom et La Grande Boutique vous invitent à un moment privilégié de musique et de partage avec les stagiaires du Parcours Musique Modale #2 et de Kreiz Breizh Akademi #11.
Ouvert à tous·tes.



Bec'h d'ar billig

GWENER 5 A VIZ EVEN - 7 e
Landelo, Presbital kozh
2 €

Pephini a zegas boued evit lakaat war ar krampouezh ha boeson. Toaz ha billig war al lec'h. Digor d'an holl brezhonegerien deraouidi pe en ho pleud, a bep oad, o deus c'hoant klevout pe komz brezhoneg.

Kwizz hag Kan b'ar bistro

GWENER 5 A VIZ EVEN - 7 e
Boneur, O P'ti Boneur
Digoust

C'hoari e brezhoneg gant goulennoù a bep seurt (sport, sevenadur, istor, geografiezh, brezhoneg...), gant fent ha plijadur ! Digor eo d'an holl (troet eo ar goulennoù e galleg). Mat eo kaout ur brezhoneger pe ur vrezhonegerezh dre skipailh d'an neubeutañ memestra. War lec'h e vo kan ba'r bistro. An holl dud a fello dezho kanañ a vo deuet mat. *Pizza a vo war al lec'h.*

Bec'h d'ar billig

VENDREDI 5 JUIN - 19h
Landeleau, Ancien presbytère
2 €

Chacun-e apporte ses boissons et de quoi garnir les crêpes. Oaled Landelo fournit la pâte et les billig. La soirée est ouverte aux bretonnant-es de toutes générations, apprenant-es ou confirmé-es et à celles et ceux qui souhaitent découvrir ou entendre parler breton.

Soirée quiz et chant au comptoir

VENDREDI 5 JUIN - 19h
Botmeur, O P'ti Boneur
Gratuit

Quiz en breton avec des questions diverses (sport, culture, histoire, géographie, langue bretonne...), tout cela dans la bonne humeur ! C'est ouvert à tous.tes (les questions sont traduites en français). Prévoir un brittophone par équipe. La soirée se poursuivra par un kan ba'r bistro, un chant au comptoir. *Des pizzas seront vendues sur place.*



Atelier Kanterezh

SADORN 6 A VIZ EVEN

1e30

Landelo, Presbital kozh
Priz diouzh ho c'hoant

Sot eo Isabelle Caignard gant ar gannerezh gouez pe ar beizanted. Kinnig a ra dizoleiñ meur a spesad a c'hall bezañ plezhet. N'eus ket ezhomm da gaout un oserezh evit ober paneroù talvoudus ha padus. Digor eo ar staj d'an holl, deraouidi ha tud kadarnaet. Trawalc'h eo degas ur gontell fichet mat, un davanjer kozh pe ur pezh danvez evit gwareziñ e zilhag hag un troc'her

Fest noz

SADORN 6 A VIZ EVEN

Sant-Nikolaz

10€

Fest-noz gant Dañs ar jâze, Mu(r)zicos ha Paotred al Loc'h. En diavaez war planchot. *Tavern ha boued bihan war al lec'h.*

Atelier de vannerie

SAMEDI 6 JUIN - 13h30

Landeleau, Ancien presbytère
Prix libre

Passionnée de vannerie sauvage ou paysanne, Isabelle Caignard propose de découvrir plusieurs essences qui peuvent être tressées. Pas besoin d'avoir une oseraie pour faire des paniers utiles et durables. Le stage est ouvert à tous, débutants et confirmés. Il suffit d'apporter un couteau bien affûté, un vieux tablier ou une pièce de tissu pour protéger ses vêtements et un sécheur.

Fest noz

SAMEDI 6 JUIN

Saint-Nicolas-du-Pélem

10€

Fest-noz avec Dañs ar jâze, Mu(r)zicos et Paotred al Loc'h. *En extérieur sur parquet. Buvette et petite restauration sur place.*

Gweladenniñ Mirdi Sérusier

SUL 7 A VIZ EVEN - 11e
Kastell-Nevez-ar-Faou,
1 plasenn André Le Gall
Eus 3€ betek 10€

Gweladenn displeget
diskouezadeg pad ar Mirdi
Sérusier. Diskouez a ra homañ
hentad arzour Marguerite
ha Paul Sérusier hag ivez o
liammoù gant o c'hêr-degemer,
Kastell-Nevez-ar-Faou.

Sonadeg e Ty Elise

SUL 7 A VIZ EVEN - 6e
Plouie, Ty Elise
Priz diouzh ho c'hoant

Ar ganerez Typhaine Corre
hag ar soner akordeoñs Tangi
Le Gall-Carré, kaset gant berzh
ar ganaouenn *An hini karetañ*
hag an engouestl degaset gant
o videoioù war ar rouedadoù
sokial, a ziskouez o fladenn
gentañ, gortozet-bras gant
an dud a-benn ar fin. Gant o
c'henemglev sonerezh hag
o ampartiz e c'hallomp gwelet
ar from hag an nerzh a zo enno.
An albom, diazezet war
ar brezhoneg, a zegas e awen e
testennoù kizidigezh ar varzhez
Naig Rozmor hag ar skrivagner
Herve ar Gall. En e vleud emañ
en-dro d'an dieubidigezh ha
da wirioù ar merc'hed, ha
lakaat a ra war-wel tudennoù
merc'hed kreñv dre ur sonerezh
savet penn-da-benn gant Tangi
Le Gall-Carré.

Visite commentée du Musée Sérusier

DIMANCHE 7 JUIN - 11h
Châteauneuf-du-Faou,
1 place André Le Gall
De 3€ à 10€

Visite commentée
de l'exposition permanente
du Musée Sérusier.
Cette dernière présente
le parcours artiste
de Marguerite et Paul Sérusier
ainsi que leurs liens avec leur
ville d'adoption, Châteauneuf-
du-Faou.

Concert au Ty Elise

DIMANCHE 7 JUIN- 18h
Plouyé, Ty Elise
Prix libre

Portés par le succès de
la chanson *An hini karetañ* et
l'engouement suscité par leurs
vidéos sur les réseaux sociaux,
la chanteuse Typhaine Corre
et l'accordéoniste Tangi
Le Gall-Carré dévoilent enfin
leur premier album, très attendu
par le public. Leur complicité
musicale et leur talent nous
offrent un opus fidèle à
l'émotion et à l'énergie qui les
caractérisent. Ancré dans la
langue bretonne, l'album puise
son inspiration dans les textes
empreints de sensibilité
de la poétesse Naig Rozmor
et de l'écrivain Herve ar Gall.
Son fil conducteur s'articule
autour de l'émancipation et
des droits des femmes, mettant
en lumière des figures
féminines fortes à travers
une musique entièrement
composée par Tangi
Le Gall-Carré.

Typhaine Corre

Tangi Le Gall-Carré



Goulou mi steredenn

Kaozedennoù e Landelo

MEURZH 9 A VIZ EVEN

6 e 30

Landelo, Presbital kozh
Digoust

Deuit da flapiñ ! Atalier evit
komz pe klevet brezhoneg.
Digor d'an holl liveoù.

Kaozedennoù e Plonevez

MEURZH 9 A VIZ EVEN - 5 e

Mediaoueg Plonevez-ar-Faou
Digoust

Deuit da flapiñ ! Atalier evit
komz pe klevet brezhoneg.
Digor d'an holl liveoù.

Causeries à Landeleau

MARDI 9 JUIN - 18 h 30

Landeleau, Ancien presbytère
Gratuit

Venez discuter ! Papotte en
breton ouverte à toutes et tous,
débutants ou confirmés.

Causeries à Plonévez-du-Faou

MARDI 9 JUIN - 17 h

Médiathèque de Plonévez-
du-Faou
Gratuit

Venez discuter ! Papotte en
breton ouverte à toutes et tous,
débutants ou confirmés.



Tavarn ar vrezhonegerien

GWENER 12 A VIZ EVEN - 6 e
An Dachenn-Gampiñ e Karaez
Digoust

Digor d'an holl dud a fell dezhe komz pe klevet brezhoneg gant ur banne ha boued-polikan. Aozet gant Emglev Bro Karaez.

Atelier kan gant Jean-Pierre Kere

SADORN 13 A VIZ EVEN
9 e 30
Karaez, Ti ar vro
10€

Ar pal : deskiñ ur ganaouenn hag adlakaat anezhi war marc'had Karaez e fin an atelier. Bep miz e ped Raok kanerien pe kanerezed da zont da rannañ o doare da ganañ e brezhoneg. Ar wech-mañ e tesko deomp Jean-Pierre Kere arz ar gavotenn !

Café des brittophones

VENDREDI 12 JUIN - 18 h
Bar du camping de Carhaix
Gratuit

Ouvert à toutes les personnes souhaitant parler ou entendre la langue bretonne autour d'un verre et d'amuses-bouche. Organisé par Emglev Bro Karaez.

Atelier chant avec Jean-Pierre Quéré

SAMEDI 13 JUIN - 9 h 30
Carhaix, Ti ar vro
10€

L'objectif : apprendre une chanson et la restituer sur le marché de Carhaix à la fin de l'atelier. Chaque mois, Raok invite des chanteurs ou chanteuses à venir partager sa pratique du chant en breton. Cette fois, Jean-Pierre Quéré nous initiera à l'art de la gavotte !



Gouel ar Menez

**SADORN 13 A VIZ EVEN
SUL 14 A VIZ EVEN**

**Speied
Digoust**

Gouel ar Menez a zo daou zezvezh gouel e kreizig-kreiz Speied gouestlet da sevenadur Breizh ha digoust penn-da-benn ! Ar pal pennañ eo kenstrivadeg sonerien a-feson e bro ar menezioù evit kampionad Breizh ar Sonerien a vez dalc'het e Gourin e penn kentañ miz Gwengolo. Un diskouezadeg eus Gouren a vez kinniget war ar blasenn Roundwood. An tournamant-mañ evit ar re yaouank hag evit ar re gadarnaet a c'hoarvez war skiur, evit brasañ plijadur ar c'hourenerien. Bez' e vo ivez ar c'helc'h keltiek Brug Ar Menez. Abaoe meur a vloaz emañ ar strollad bugale o klozañ an devezh kenstrivañ a-raok ma vefe embannet an disoc'hoù hag o kinnig d'an dud e arvest nevez.

Faites de la montagne

**SAMEDI 13 JUIN
DIMANCHE 14 JUIN**
**Spézet
Gratuit**

Deux journées de fête en plein cœur de Spézet dédiées à la culture bretonne et entièrement gratuites ! L'objet principal est le concours de sonneurs qualificatif en terroir montagne pour le championnat de Bretagne des Sonneurs qui se tient à Gourin début septembre. Une démonstration de Gouren est proposée sur la place Roundwood. Ce tournoi pour les jeunes et pour les confirmés se déroule sur sciure, pour le plus grand plaisir des lutteurs. Le cercle celtique Brug Ar Menez sera également présent. Depuis plusieurs années, le groupe enfants clôture la journée de concours avant l'annonce des résultats et présente au public son nouveau spectacle.



HOR C'HEFRIDIOÙ ?

Kehentiñ

Lakaat a reomp war-wel an holl neventi tro-dro d'ar brezhoneg e Kreiz-Breizh dreist-holl, hag e Breizh ivez. Aze emamp ivez evit titouriñ an holl o defe c'hoant gouzout hiroc'h war ar brezhoneg e Kreiz-Breizh : Pelec'h e c'hellan deskiñ ar yezh ? Peseurt doareoù zo da zeskiñ ? Pelec'h e c'hellan ober ganti er vro ? Respont a raimp deoc'h !

Buheziñ

Ur bern abadennoù a gasomp e Kreiz-Breizh evit lakaat da vevañ ar yezh. Baleadennoù, nozvezhioù sinema, kaozeadennoù, prezegennoù, stajoù, c'hoarioù kwiz... An holl anezhe a vez embannet e-barzh hon deiziataer.

Ambroug

Ur yezh eo ar brezhoneg, hag evel evit pep yezh eo pouezus e c'hellfemp ober ganti e pep lec'h, e vefe klevet, skrivet ha lennet. Broudañ a reomp an holl gevredigezhoù sevenadurel, sportel ha ekonomikel d'implij ar brezhoneg. C'hoant ho peus da implij ar brezhoneg en ho embregerezh met n'ouzit ket peseurt mod ober ? Deuit e darempred ganimp !

NOS MISSIONS ?

Communiquer

Nous mettons en avant toute l'actualité autour de la langue bretonne en Centre-Bretagne. Nous sommes également présent-es pour informer toutes les personnes qui souhaitent en savoir plus sur le breton : Où puis-je l'apprendre ? Quelles méthodes existe-t-il ? Où puis-je le pratiquer sur le territoire ? Nous vous répondrons !

Animer

Nous organisons de nombreuses animations pour faire vivre la langue. Randonnées, soirées cinéma, discussions, conférences, stages, jeux type quiz... Tout est dans notre agenda !

Accompagner

Le breton est une langue, et comme toute langue on doit pouvoir l'utiliser partout, l'entendre, l'écrire, la lire. Nous encourageons toutes les entreprises culturelles, sportives, économiques à utiliser la langue bretonne. Vous souhaitez utiliser la langue bretonne dans votre entreprise mais vous ne savez pas comment faire ? Contactez-nous !



Trugarekaat

Fellout a ra deomp trugarekaat an holl dud hag aozadurioù a harp Raok. Da zigentañ ar strollegezhioù lec'hel : Rannvro Breizh, Kuzulioù-departamant ar Mor-Bihan, Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Arvor, Renerezh Rannvro an Aferioù Sevenadurel Breizh, Kumuniezhioù-kumunioù Kreiz Breizh, Roue Morvan ha Menez Are, ha kumunioù Rostrenn Karaez, Gwareg, Groñvel, Brenniliz, Laoulan, Kledenn-Poc'hêr ha Kastell-Nevez ar Faou. Ar foñs Kanol Karaez hag an FDVA (Fond de Développement de la Vie Associative) ivez.

An holl izili, frammoù ha tud, a sikour kalz evit kinnig ur programm brav evel hemañ. Hag an holl frammoù diavaez a gemer perzh e gouel Raok an Hañv en ur ginnig darvoudoù. Al levrig brav-mañ zo bet savet gant ar c'hraferez Vickie Meneboo. Mersi bras dezhi evit al labour prim hag efedus kaset ganti !

Remerciements

Nous souhaitons remercier toutes les personnes et organismes qui soutiennent Raok : la Région Bretagne, les Conseils Départementaux du Morbihan, Finistère et Côtes d'Armor, la Direction Régionale des Affaires Culturelles Bretagne, les Communautés de Communes du Kreiz-Breizh, de Roi Morvan et des Monts d'Arrée, et les communes de Rostrenen, Carhaix, Gouarec, Glomel, Brennilis, Langoëlan, Cléden-Poher et Châteauneuf-du Faou. Le fond Canal Carhaix et le Fond de Développement de la Vie Associative également.

Tous nos adhérents, structures et particuliers, qui œuvrent à l'élaboration de ce beau programme. Et toutes les structures extérieures qui participent au programme de Raok an Hañv en présentant des événements.

Ce beau livret a été réalisé par la graphiste Vickie Meneboo. Un grand merci à elle pour sa disponibilité et sa réactivité !


Luc'hskeudennoù / Crédits photos

Eric Legret, Simon Meunier, Thierry Le Goff, Alexandre Lamoureux, Tourisme Roi Morvan, Christine Fouillard

Raok an Hañv

ABADENNOÙ E BREZHONEG

Temps fort autour
de la langue bretonne



Kengevredigezh evit
ar brezhoneg e Kornôg
Kreiz-Breizh eo RAOK.
Bodañ a ra kevredigezhioù,
embregerezhioù ha tud
evit lakaat war-wel muioc'h
ar Brezhoneg er vuhez bemdez,
en darvoudoù, oberezhioù
hag intrudu.

Raok rassemble
des associations, entreprises
et particuliers du Centre Ouest
Bretagne qui ont à cœur
de rendre le breton plus visible
dans la vie quotidienne,
les événements, initiatives
et actualités.



GOÛT HIROC'H
Toutes les infos

RAOK.BZH

raok.bzg@gmail.com
06 13 71 88 88



FDVA
FONDÉ POUR LE
DÉVELOPPEMENT
DE LA VIE
ASSOCIATIVE

